

Hentad-reterañ Endro e brezhoneg e Sant-Ervlan, Park Traoñ ar C'hezin

10 balizenn / 1,5 km / Adalek 7 vloaz

Un hentad-reterañ, petra eo ?

Evit kregiñ gant ar reterañ pe evit mont pelloc'h ganti, deuit war hon hentad d'ober ur valeadenn dudius pe ur gwir bleustradenn sport. Dav e vo deoc'h adkavout balizennoù strewet en natur gant sikour ur gartenn.

Penaos ez a en-dro ?

Choaz zo etre an daou seurt kartennoù amañ-dindan. Ar stumm niverel hepken zo e brezhoneg penn-da-benn. Ma implijit ar gartenn baper e respontoc'h da c'houlennnoù graet e galleg (war ar balizennoù staliet war an dachenn).

Gant ur gartenn baper

1. Sellet mat ouzh ho kartenn : an takadoù hag ar pezh a gaver er park zo diskouezet warni dre arouezioù ha livioù, a zo displeget en alc'hwez.
2. Treiñ ho kartenn war an tu mat, d'ar pezh a zo warni da glotañ gant ar pezh a welit dirazoc'h war an dachenn.
3. Sevel ho hentad deoc'h-c'hwi : klask al lec'h loc'hañ war ho kartenn ha dibab an hentad gwellañ evit kavout ar valizenn gentañ. Aesoc'h e vo deoc'h en em reterañ ma heuilhit an ahelioù pennañ evel ar gwenodennoù, an hentoù, ar gwazhioù-dour.
4. Ur wech kavet ur valizenn, minaouediñ ar gael boentañ (respont A, B pe C) evit respont d'ar goulenn skrivet warni ha talvoudañ ez oc'h tremenet.
5. Ur wech echu ho troiad ganeoc'h, gwiriekaat ho respontoù war ar c'hartennoù diskoulmoù e saint-herblain.fr

Ma kavit gwelloc'h mont gant ho hent gant ho poellgomzer (e brezhoneg)

1. Pellgargañ an arload VIKAZIMUT (s.o. ar c'hod QR amañ e-kichen). Dibab ar mod C'hoari. Choaz ho hentad.
2. M'ho peus staliet an arload dija e c'hallit digeriñ kartenn an hentad war-eeun dre ar c'hod QR all, an hini a zo a-zehoù, ha dibab ar mod C'hoari.
3. Talvoudañ ar valizenn Loc'hañ (emañ e-kichen ar banell). Goude-se e vo dav deoc'h talvoudañ pep balizenn pa dremenoc'h hebiou dezho, gant ar c'hodoù QR staliet warno (nemet ho pefe dibabet ar mod « talvoudañ gant ar GPS »).
4. Respont d'ar goulennnoù e brezhoneg diwar-benn an endro er park. Mat da c'houzout : er valizenn 4 eo disheñvel ar goulenn e brezhoneg diouzh an hini graet e galleg.
1. Talvoudañ ar valizenn Degouezh evit echuiñ an hentad (ma karit e c'halloc'h enrollañ tres resis ho hentad).



Enklask laouenidigezh

Leuniañ hon enklask (<https://enquete.saint-herblain.fr/index.php/955519?lang=fr>), laouenidigezh e saint-herblain.fr, mar plij, abalamour deomp da anavezout hoc'h ali ha da zalc'her kont anezhañ kentañ gwech ma vo nevesaet an hentad ganeomp.

Park ar C'hezin, un trepas bevliesseurtead hag a rank bezañ doujet

Klaskit tremen hebiou an dangadoù ha ribloù ar wazh-dour (nemet e vefe balizennoù), mar plij, evit gwareziñ liesseurtead an natur er park, ha chomit didrouz kuit a spontañ al loened.

An hentadoù all

1. Deraouidi (10 balizenn, 1,5 km, adalek 7 vloaz)
2. Sportourien (rederien-reterañ arroudet, 40 balizenn, 5 km)
3. Balizennoù par (20 balizenn, 3,5 km)

Darempred

Mont e darempred ganeomp ([saint-herblain.fr/Nous contacter](https://saint-herblain.fr/Nous%20contacter)) evit goulenn titouroù, sevel klemm, mirout un hentad evit ur skol, ur gevredigezh, ur c'hlub peotramant un aozadur prevez.



Vikazimut

Pellgargañ an arload

ANDROID



IOS



Mont d'an hentad endro





Adkavout ar balizennoù e park Traoñ ar
C'hezin, gant sikour ar gartenn reteriñ.
Dav eo respont d'ar goulennoù ha
minaouediñ ar respont mat bep tro.
Ur wech echu ho troiad ganeoc'h, gwiriekaat
ar respontoù e lec'hienn internet ar c'mun.

A horizontal line with a vertical tick at the left end and a label "50m" below it.

Skeul : 1/2500
Keitpeilder: 2,5 m
Kartenn savet e 2026 gant :

